

- 79 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

113. AN NEVEZ AMZER GOUDE AR BREZEL  
(follenn 78)

Kourach tud iaouank,  
erru ar sezon excellent  
an nevez amzer  
ar joa bras en peb kartier  
evid ma hallo peb hini  
Sortial er mez e di,  
Da ebatall a da c'hoari  
mes divoalit da behi  
me o ped, tollid evez,  
tiwoalid abred  
a na viet ket tromplet.

—  
e tro pad ar goan  
e zom oll ker trist a tra  
Nom neus nemet miser  
e vezo ker ar beva  
Mez erru an amzer vad  
Goëlad a reñio e varhad,  
Serten eo, eur c'houlz benag.

—  
Peb tra tout a zeu de poent  
Koulz er blo-man evel kent  
Kignen a kerez  
a spezard a kastrillez  
prun gregon, fiez  
skoden per ag avallou  
pa deuio ar pardoniou  
(suir) kraon ag allamandez.

—  
Memeus er goukoug  
a deu da annonci partout  
joa d'an oll el lec'h an droug  
(....) divoelid abred  
bras eo sur ar providenç  
en Spagn koulz ag en Franç  
en assembleou  
eo ebat klevet ar farçou

- 80 -

pa vezont e neum kavet  
da ziskours gant o merhet  
(in c'hontillon) deguizet  
ma na zivoallont abred  
Tollid evez dud iaouank  
(rag tromplan en ezamant).

~~~~~  
VVVVVVV

Mari Bozeg, 18 févr. 1851

~~~~~  
VVVVVVVVVVVV